

RIMOU

HA

GOULENNOU

EVIT AN EUREUJOU



E MONTROÛLEZ,

E ty LANOË, Imprimeur, rue Carnot n° 7



RIMOU

DISCOURSIU HA GOULENNOU

Evit en Eurejou



Discour pa zèr da bedi da eun Eured

Salud dêc'h oll compagnunez,
S Dre ar salud e commançan va devez.

Me a zo deut da doull ho tor

Gant calz a joa hag a enor ;

Antreet joaüs en ho ty

Gant eur c'hoant vras d'ho saludi.

Da zoue e rentan ar salud humblamant ;

Ha goude me ray va c'hompliment.

Piou eus an ty-man a bedin-me da guenta ?

Pedi a ran ar mestrou ha kement a zo ennâ ;

Mar deus domestiquet en ho ty,

En o fedan ive qercoulz a c'houi ;

Rac re a labour am be-me

O pedi an eil goude eguile

Da zonet hep faut da eur Banquet

A vezo evidomp preparet

Gant *Mari Lipiq* ha *Yan Baron*

Pere ho ped ganemp-ni a greiz calon ;

Fixet eo an devez da Zemeurs qenta ;

Rac-ze, mar plich ganêch, deut oll da assista,

En *Plouyan* vo an Eured en ty *Flampeç* ar Banquet

Mar plich ganêc'h en em gafet hac e vimpcontant rentet

Me ya da gonta d'êc'h eur veac'h ;

Dont a reot da . . . da guemer ar plac'h ;

Ac 'hane e vezo cunduet d'an ilis,
Betec an auter, evel ma zêo requis
Evit ober ober ar memes contrad
Evel a eure goechall he mam eus he zad.
Eno neuze e vezint eureujet
En presañ Doue hac an asistantet,
Eont solanite vras an Ilis.

Com zomp brêma en ber divis
Me eo an hini a zo choazet
Da bedi evit ar Plac'h a Eured,
D'e fedi ha de enori,
D'e assista da eureuj i

N'ouzon ket sur ar Gompliment
Ha n'oun ket custum da barlant ;
Mes iaoauank ouu, hag e tesqin,
Mar plich ganêc'h va excusin,
Ker brao oc'h eus lemmet ho têod
Evel eur falc'h da drec'hi yêod,
C'houi oc'h eus eur sac'had langach.
Ha n'en d'eo ket allamagnach.
Preparet oc'h eus ho tiscoursiou
Ha studiet mad ho rimou ;
Mes abars va viot er penn e vezo tom ho chaqueden

Ni zo o clasq eur goulmic venn hag a ra hon anqen :
C'houi a elfe renta rêson
Deomp-ni diouti va mignon.

Pa gomzit deus a goulm. oc'h en em goal gavet :
Ho kentel a ouzoc'h, ha caer e zeo rimet,
Ma vijen bet er c'hademi,
Me a rêsonje koulz ha c'houi,
Hag a denje eun tol latin
Ouzoc'h dre ma z'oc'h eur pot fin.

Eun den yaouanqzo en ho touez aba ou e pemzec de
Eudevoaarretet da barreseur plac'hen ho compagnu-
Bet e tle beza anavezet
Enescoa cleiz e z'eo blesset

Santout a ran, dre ho comzou,
Coulz evel dre ho complimantchou,
Ho poa ezom eun dra benac :
Me meus em zy eur vanden vad,
A c'hraguez coulz a plac'het,
Mes neus nikun anê blesset

Ar blesseür en deus ar plac'h-se
A vezo certen prest pare,
Hac ho sevicher coulz hag hy
Digassit-hi deomp deus ho ty.
N'ho pezit morse nep chagrin,
Pareet vo hep dale fin.
Evit contantit ho speret
Me a ia etouez ar merc'hed.

Cetu amâ unan dirazoc'h
Ma na blij dêc'h, diffici oc'h ;
Eur vaouez adret a lijer,
Hac e voar bravic e micher.

En em lacat a rit en risq
Da gaout eun affer meubet trist ;
Evit beza ar vreg-se en ho ty,
Na ellit ket dispos diouti.

Me a vel, n'ouffec'h ket e nac'h.
E fell d'ec'h guelet hor plac'h :
Cetu aman eur plac'h yaouanq
Jentil ha coant, guyê ha galant
N'eus goas er seiz parros tosta
A refuse certer houmâ.

N'a ket da veza refuset,
Ma vije diine permettet,
Plac'hic yaouanq, savit ho penn
Da zellet ouz ar gristenien :
Abars nemeur, me a esper,
Ho pezo eur gwir servicher.

Me gred e z'oc'h re importun,
Hac e chomfoc'h sur hep nicun,

Gwelet oc'h eus ha plac'h ha greg :
Ha n'eo ket contant ho speret ?

Arça eta va mignon bras,
Qent ma kuitaïmp-me ar plac,
Digassit deomp ar plac'h nevez,
Gant conje he zud hag he lignez,
Evid iaouennad he fried,
A zo meurbet goal contristet.

Goulen a reomp a galon vad,
Gant oll bennos ho mam ha tad
Hag e oll guerent, Catell an Dourdous,
Ha Yan Gundu, gant e doc plous,
Da vont d'an ilis da eureuji,
Evit achi an dimezi.

Qer brao, va mignon e comzet,
Ho refusi na ellàn ket :
Bremaïc souden en eun instant,
Me lakai ho speret contant,
O presanti d'ec'h an objet,
Ha n'eo ket mez sur e gwelet.

Cetu aman eur fumelen
Qer caer evel eur giroflen ;
N'eus na fourdilis, na lavant
Evelti ker rejouissant :
Avancit eta, Den Nevez
Evit rei an dorn d'ho mestrez.

— Didostaït eta va mignon,
Brema demeus a greiz ho kalon,
Da ziguemeret ho pried, ha dalc'hit mad dezi bepre,
Ev c'hlenvet hag er yec'hed, pa vint unisset,
N'eo ket ker fall ho kevridi,
N'antreat sur ebars an ty
Da ben an daol vit e c'herc'hat ;
Graç dec'n ho taou da veva ervat
E doujanç Doue, m'ho recevo
En e c'hloar goude ho maro.

*Aman e peder ar Bederien da antreal en ty
ha da zével ouz taol*

AR PLAC'H YAOUANQ

Silans eta, Compagnunez,
Ma parlantin evit ar plac'h a Zevez.
Dre ma zavan ebars em za,
Excus diganêc'h a c'houlennan,
Mari lipid e deus va fedet
Da eva eur banne d'e yec'het,
Peb action gaer, par er gràn,
Dre Sin ar Groas, er commançàn ;
En hano an Tad, ar Mab, ar Speret Gloan,
Tri Ferson distinct en unan :
Da Zoue ar zalut da guenta,
An eil d'an itron Varia ;
An drede d'ar Zent ha d'an Æle,
Dêc'h-hu compagnunez enorabl, e présetan'r bovare
Evit ar boan oc'h eus bet,
E zàn da rêi d'ec'h peb a voquet,
Pini a meuz dastuinet er Jardin a Eden,
En eur c'haread fleur, pa voan enni o pourmen :
Da guenta d'ar Vêleyen e roan ar bec'herien,
Dre ma zint o Fastoret hac o Gouarnerien,
Goude d'an Dud-Chentil ha d'an Noblanç,
Pa e meus an enor da barland en o fresanç ;
E roàn ar gurunen spern
A zougas Mab Doue, p'or prenas eus an ifern
Evit ma teuyo da bikat o ene,
Ha ma vezint ferm da zouten ar Fe :
Dêc'h-hu, tud demezet, ozac'h ha graguez,
E roàn ar vezen a vuez,
Rac en deillou me meus bet remerquet
Ar c'homzou precius eus ar barcientet.
Ha c'houi goazet yaouanq, m'ho ped da imita
An Autrou St-Joseph, pa voa var bed-mâ

Ha ni merc'het yaouanq, lakomp hor fantasi
Da enori ar Verc'hes pini a hanver Mari :
Imitomp he fervor ; beza e zeo ive
Rouanez an douar hag ivez euz an êe,
Me zo en em vezet hirio eus a eun dra,
Ha n'en don ket guiabl na capapl anezha ;
Rac me zo eur plac'h yaouanq ignorant,
Hac e meus nebeut a skiant ;
M'am bije bet eun tam diskamant,
M'am bije têod avoalc'h evit parlant,
Mari lipiq, mignonet, hirio sur a lavar :
N'eus nicun er compagnunez n'e c'har :
Mes ar re e enor o tont d'e asista,
Eus ar re-ze sur e deus calz a joa ;
Mes eun all zo ordrenet dei da garet ;
Cetu amâ e hano : Yan Baron e zêo hanvet.
Arça ta, Compagnunez enorabl, me ho ped,
Pa zomp amâ oll en em rassemblet,
Eun tol chanç e ve demp en em gafemp james,
Hep mancout hini ebes assamblet,
Na meus na pouvoar na gallout
Da ober rêson d'êc'h-hu tout.
Mes brêmàn e zàn da eva eur banne
D'ho yec'het an eil ha c'eguile.

Eva ra eur banne da yec'het an Den Yaouanq

Me ya c'hoas da eva eur banne
Da yec'het an den yaouanq ive :
Ha evit ma vezo ganêc'h anavezet,
Charlezic Mistiflor, brêmam e regetan
A bep seurt madou er bed-màn,
Hac oll soùet var ar bed ; mar dê gant Doue destinet.
Ma vijen tenzorierez var oll tenzoriou ar bed,
A netra ne vijec'h refuset mes Doue en deus gouarnet,
Evit bea er bed meuled : evomp eur banne d'ho yec'het

*Discours evit goulen eur plac'h neve da eureuji gant
ar respont conform evit e rei*

Goulen, Debonjour dèc'h, Compagnunez,
Salud gant laouenidiguez :
Pa ho quelan az assamblet,
Dibreder ha qer brao guisquet,
E credàn mad oc'h eus amzer
Da zelaou eun daou pe dri guer,
Ni a zo amàn tremenedi :
Carguet demeus a guevridi,
Lavarit demp eta bremàn
Pe seurt hano en deus ar guer-man.

Respont, Ni a rent ar memes salud
Dèc'h oc'h unan coulz ha d'ho tud.
Sansipl omp d'ho complimentchou.
Coulz a doc'h oll reverançou,
Ac ho n'eus calz a interest
Da supposi oc'h tud honest ;
Mes mar dèo tremen e fell dèc'h,
N'hon eus affer abet ganèc'h,

G. Ouz ho clèvet o parlant
Me gred oc'h eus calz a dalant,
Hac e velan ive ractal
E zoc'h sur en goût da farçal,
Pa zeo guir na respontit ket
D'ar pez a meuz goulennet ;
Mes ni a zo deut eus a bell.
Har mar chomomp-ni discabel,
Ec'h alfemp-ni goude c'hoezi,
Dont da dapout eur pleuresi.
Rac-se, permettit demp sorden
E cholofemp brèman hor pen :
Mar cavit e zeo difeçon,
Levarit demp-ni ar rêson.

R, A viscoas e meus bet clevet

En fall pennou loe avelet ;
Ha ma attrapit pleurezi,
N'en em glemmit qet ouzomp-ni ;
Beza oc'h euz pep liberte,
Grit ta diouz ho commodite.

G. Penos eta ? va guir vignon,
Me ho cav eun den a fêçon,
Hac e laken ebars em speret
E vijen bet ganêc'h pedet
Da lakat an tan var va fiben,
Dre ma zomp guir amezeyen ;
Neuze souden, en eur fumi,
Me a lavarje va c'hevridi,
Hac er fin neuze va c'homplimant,
Har ma bije d'ho santimant.
O pije bet ar civilité
Da offr un tan hac eur banne,
Ma vijec'h bet kent aviset,
O pije sur calz gonezet.
Rac me a dleye ho pedi
Da zont ganemp da zijuni,
Ha goude-ze c'hoas da leina
Hac erfin goude da goania ;
Mes ma na rit demp ken enor
Nemet da zivoal toul ho tor,
Ha chom ker fier en hoc'h ez
Evit hon delc'hi-ni ermez.
N'en d'oc'h-hu ket eun heretiq
Pe mab dar falz pinvidic !

R. Selaouid mad, va c'hamarad :
En em en entend a gaffen mad
Ni hon eus guelet avichou
Certen tud a vendennou
Oc'h antren ardiamant amâ,
Hac o tonet da zifframa
Kig hac anduill, lin ha kig sall

Crampouez, ha calz eus a draou-all ;
Hac eno ret mad deomp, goude-ze,
Delc'hel hon ty en surete.
Allas ! ni ne ouzom doare,
Ha c'houi a vez euz ar seurt tud-se ;
Couscoude mar d'oc'h skuis en ho sa,
Ha c'hoant dêc'h-hu da azea,
Me royo dêc'h eur voutez pren :
Azeit unan en pep penn ;
Neuze, hac e vec'h-hu ermez,
E parlantot guell en oc'h êz.

G. Mar deo difianç ho lakaa
D'hon trêti er fêçon-mâ,
E tislêryad dêc'h a bouez pen
N'omp qet ar seurt friponerien,
Laeron anduil ha kig sall,
Na troyadellerien all,
Mes hon deveus commission
Conform d'hon Religion ;
Rac merket eo ebars er Scritur
Penos gêeachal eun den fur
A voa hanvet Eliezer,
A ras ar memes micher ;
Ha penos, hervez an histor,
E voe trêtet gant calz enor.

R. An histor-ze sur, va mignon,
A verit kalz attantion.
Eun talent demeurez ar c'haëra
Eo gouzo ut èn em explika.
Hac erfin eus ho compliuant,
Mar bezit euz ho santimant,
Ni a velo petra da ober,
Ha petra ras Eliezer ;
Pe mar er c'herit, da guenta
Livirit petra voe grêt dezâ.

C. Eliezer, va mignon kès,

Ne voe ket lezet ermès :

Deputet e voe gant e vest,
Evit pini en d'oa intérest,
Da glask eur plac'h voa destinet,

Gant Doue evit pried

Da Isaac, den yaouank flam,

Mvb unik da Abraham

E el-se dre urs-an Tad,

E partias mintin mad,

Hac ec'h antreprenas joaüs

Eur veac'h hir, fatigus,

Var zu ar Mesopotami.

Hep gouzout hent ebet da vont d'y.

Mes pa ignorer an hentchcu,

E rêr mad var boes goulennou

Evelse pa zent éruet amàn

E c'houlennàn hano an ty-man

R. Ho ! ma vije deut hennes aman,

Ni hor bize poket dezàn ;

An den-ze, var ar lavarit,

A voa eun den leun a verit ;

Mes bremàn euz eun amzer all,

Hac e vale kalz a dud fall ;

Bremàn e veler bizier balan

Prest da grevi gant bêr-alan,

Oc'h invanti niver traoù

O klasq lakat güir ar gaou ;

Uza a reont tout o adres,

O prometi môr ha memez ;

Eun den a lavar calz a draou.

N'int peurvuia nemet eur gaou,

Mar doc'h eur gascon evel-se,

Troît ho kein pe kit adare.

G. An hini a zo va model,

A voa güirion ha fidel,

Clévit c'hoas daou pe dri guer,

Var compagnon Eliezer,
O veza bet pedet Doue
D'e gundui en demarch-se,
Ec'h êruas directamant
Elec'h ma edo ar plac'h yaouanq ;
Kaer evel eur stereden, en eur famill
Tud demeus a re charitapla,
Pedet e voe da vont en ty,
Kinniguet dezàn da zêbri ;
Mes en a lavaras a grenn
Ne guemerje nep brienen
Nemet goude explika
An urzou voa roet dezà
Aman ive, va breur ker,
Ne rit ket deomp coll hon amzer
Deut omp gant an intantion
Evit ar memes commission,
Hac e zeo deomp-ni revelet
Emedi a ze hon reget.
Kaer ho pezo dissimuli :
Hor plac'h a zo ebars ho ty :
Lavarit dêi e mon amâ
Gant an ini a gar ar muia
Demeus an oll grouadurien
Pere a vev hac a dremen,
Hac én eo a bed anezi
Da zon brêmàn da contracti
Evit beva ervant assambles
Ar rest deus o oll buez.
N'en em arrêtân ket da veuli,
Da fougeal, na da bombadi ;
Ni a voar ervat manifik
Peguer mad eo, peguer pinvidic ;
Anfin eun den eo. eus ar guella
A guemet a zêbr bara.

DISCOURS

*Evit goulen eur plac'h da zemezi mar be ar banket elec'h
ma emedit ar plac'h, ha mar be goulennet goude dijuni*

G. Abars ho quittât, Compagnunez,
E trugarecàn ho madelez
D'hor beza recevet en ho ty ;
Ha roet deomp da zijuni,
E tislêrian e zôn karguet
Da bresanti dêc'h eur reket.
Laquet on en penn ar vanden,
Hac e zeus c'hoant e parlantfen :
Hanzavi a ràn gouscoude
Oun indign eus an enor-ze,
Dre ma meus ket a dalent,
Discadurez, na kalz skiant.
Ar pez a deu d'am hardissât,
Eo ma credàn e zoc'h tud vad,
E viot prest d'am excusi
Ma teufe din ober fasi,
En despet d'am intantion,
D'ober mad va c'hommission.
Rac-se, ma permett'it din,
Digomplimant ec'h exposin.

R. Diskeus e rit mil act a humilite
Ha kement a civilite,
Ma veritit sur gant rêson,
E rofen dêc'h hon attantion.
Pinvidic ha den honest.
Beza savant ha modest,
Zo kaliteou ar re gaera,
Mes non pas ar re gommuna,
Ha gouzout trugarecât
Evit ar servichou mad,
N'eô ket certen an hent fall
Evit obten c'hoas re-all.

Parlantit eta hardiamant,
Hac exposit ho santimant,
Ha diouz ma z'eo commission.
Ni a vo prest da entent rêson,
Mes magnifik e ve parlanter
Hac e ve hor pennou goloet.

R. Beza e meus hirio an enor
Da bresanti dirac ho tor
Eun den yaouank leun a furnez,
Hac demeus hoc'h anaoudeguez ;
Eur merq bras demeus a skiant,
Eo m'en deus preferablant
Choazet unan eus ho merc'hed
Evit beza e bried
Gouzout a rit ê zêo dija
Publiet teir güech ar bromessa,
Ha n'hon deus den clêvet parlant,
Eus a nep seur ampêchamant,
Nac e vet en em opposet
Da retardi an eured ;
Rac-se omp deut d'e fedi
Da sont hirio da gontracti.

G. Atro dioux costez ar vaouez
E ve clasqet mil digarez,
Ha na ouffac'h ket evit petra,
Nemet delc'hel an dud en ho za.

R. Ne glaskàn qet digareou,
Mes exposi va rêsonniou ;
Gortoz a ranqin, rac ar mab eux an ty
En deveus goall faoutet e fri,
Nompas ouz en em ganna,
Mes o fourra butun ennâ,
Hac e zêo redet d'ar marc'hat
Da glasq eun adas d'e c'hriad.
Mes da c'hortos ma teuio d'ar guar
Rac ne zaloê ket, mêvar,

En' deus va dalc'het me âman :
Evit ma respontin evitàn :
Rac-se e tisklêrian dêc'h,
Entendit mad mar plich ganêc'h,
Ret e ve pare mad e fri
Abars cass ar plac'h da eureuji
En aon na ve ar beleg spontet
O velet eur fri ker faoutet.

G. M'en divije lavaret din-me,
E voa bet kûit da vort kei-se ;
Ia, rac me a voar parea
Gant remejou ar re zrolla.
An deiz all va marc'h du,
Eur marc'h mad, en creiz e fru,
A voa roguet e groc'hen
Gant eun tol dant digant eun azen,
N'ho pije birviken divinet
Gant petra e meus e pareet !
Gant eun tam kic-sal! d'e beinscillat,
Hac eun anduillen d'e c'hriad.

R. Kredit din o redet bro
E tisker trou nevez atao
Pa voan er Spagn e arme,
Eun devez ma voa casarnet
Abars eost en nevez-amzer,
Ec'h êruas eur goal affer,
Eur vrek gant eur aër a voe flemmet,
Tout e zud a voa kalz nec'het :
Facil e zonjit eo a vreg ar varvas ?
Mes nan, an aër hepken eo a grevas.

C. Me n'en dôn ket eus an dud habila.
Mes adress mad a meus da scrifa ;
Kenta lizer a scrifis biscoas
A voa scrifet gant eun aval poas,
Ha goude va güella pluen
Zobet eur picol anduillen.

Ha gant kement-se tout,
Me a meus bet grêt calz a rout ;
Ha pa bresantan eur reket,
E vezan dioc'h-tu selaoget :
Ha ne bretantan ket brêman
Beza daleet reir aman.

R. C'houi a zo savet goal mintin
Da lakat an dud da c'hoarzin :
Mes an amzer a ya en dro,
Rac-se hastom buan a fo.
Ia eur gascon en deis-all
A ras eun dro na voa ket fall,
Rac evel m'en devoa klêvet
Voa kestion eus eun eured
Gant familiou a gonseqañç
Tud pinvidic hag a brezañç
E vije magnifik dézâ
Mont ive di da leïna,
Evel m'en doa kalz speret,
Ne voe ket pell ambarrasset
Evit caout prest a digare
Da gomz ous tad ar plac'h neve.
Ar gompagnunez a voa êruet,
Ha den mui na c'hortoet
Neuze ec'h antreas ar gascon,
Gant reverançou a fêçon,
Anfin, skuis bras o saludi,
E lavaras da vest an ty ;
Me meus evidoc'h eun affer pressant,
Ac'h ell talvout dêc'h calz a arc'hant
Fachet on d'oc'h interrompi,
Mes ne ket eun dra da zifferi.
Ar mest a lavaras d'ar gascon :
Chommit da leina, va mignon.
Ha goude-ze, var bon abaster,
Ec'h ententimp ouz hon affer.

Pa voe grêt ar regal tout,
Ha deut ar poent da vont er rout
Ar gascon neuze a lavaras ;
Cetu ama an affêr bras
Gant hot merc'h a meus bet clêvet
E promêtit rêi can mil skoet ;
Mes, mar kerit, me c'hemero
Gant an anter eus anezo ;
An anter all a chom ganêc'h
Cetu eur gounik sklêr caêr dêc'h,
An tad ne gavas ket dereat
Beza evelse goapeat
Kreñdal ê en em fachas ;
Mes ar gascon a bartias ;
Buan e rankas trei e guein
Mes attrapei en doa e lein.

R. Ni n'omp ket gaskonnet,
Mes tud sincer, güir Vretonnet :
N'eo ket leinou eo a glaskomp,
Mes ar plac'h neve a c'houlennomp.

Me gred oc'h eun den ar güella,
Ha ne ve ket mad ho trompla,
E ve pec'het oc'h amusi
Ha memes dont d'ho talei :
Ar pezh zo êruet ganêc'h,
Am gra kalz nec'h, m'en assur dêc'h

Abaoue dec'h ho plac'h yaouanq
E deus chenchet a zantimant,
Me a voa êt demeus ar vro,
Hac e sonjet e voan maro ;
Mes evel ma oun en em gavet,
E deus din-me diguemennet
N'em boa nemet en em avanç,
Hac em bije ar breferanç,
Ker buan dioc'h-tu, hep dali,
Oun diredet d'he saludi.

Hac e ran hirio güeladen :
Götu aze an obaden.

Me a meus bet klêvet dija
Meur a guilloq ho cana,
Hac evit n'en dont ket c'hoas kôs,
E meus gvelet meur a vleis en noz.

En den terrubl oc'h, var ar meno ;
Mes piou ha sônch dêc'h ho credo ?
Ni a voar penos o redet broyou
En em zammer a varmaillou,
Hac e rër koll kals a amzer
O konta eur bern a c'heyer.

G'hoant oc'h eus hu-ta d'hor spounta

Ha d'hor c'hass quit hep netra ;
Ni n'omp ket sur prest da cedi,
Ha e ve red demp procedi.

Mar cedit ar plac'h-ma gane,
Me gavo eun all d'ho toare,
Unan hag a oar n'enaji,

Ha mont a rân dêc'h d'he brouvi.

An deiz-all e oan o chaseal,
E yis en ty en eur baseal

Hac e d'oa uset eur c'houlouen
Evit clask eun tam kôs spillien.

Edmirit eta pebes gteg,

Usa eur c'houlouen a vennec

Evit eur spillien dic'hroset,

Ha c'hoas ne voa ket bet caret.

Mar doc'h bas-valan, comzit ouz ounez

Da varc'hadour en allumettes ;

Pe aotramant, mar plich dêoc'h,

Goulennit-y eto evidoc'h.

Hor plac'h-ni zo en ty-mà,

Roet e deus demp e fromessa,

Gant consantamant e zud :

Klêvit gante, n'int ket mud.

Seblantout a ran ouz o clève
E ve an affer decidet :
Ha mar dê guir kement-se,
Ne ket me mui a rêi dale.
Permettit din-ta eun nebeudic
Ma rin brêma eur baleic,
Ha c'houzout hac èn zo en ty
Eur plac'h content da zimezi.

En eur bresanti eur Plac'h Yaouanq

Sellit eta amàn va mignon,
Aomàn zo eur plac'h a fêçon ;
Mar dêo contant ha d'ho toare,
Bezit eta grêt evelse.

Complimant da eur Plac'h Yaouanq

Bonjour d'eoc'h-u, Plac'h koant,
Fleuren fresk, boket charmant ;
Certenamant n'en dêo ket c'houi
A dle chom hep caout ho parti.
Plijet goude an embannou,
E ve casset ar goulennou,
Hirio na ellomp ket dale ;
Eur vech all a zo adarre.
Ma noc'h ket ervat contantet
Gant an objet zo presantet,
E zàn c'hoas da ober eur bale
Da glasq unan a vo d'ho toare.

Holla ! n'hi n'en domp ket tud fall
Da zont da guemer tra eun all :
Ar vreg-se zo perchennet,
Nemet bez e vez divorcet ;
Eus ar saurt-ze mallig hini
Ne deuyo ac'han ganeomp-ni

Da eun intanvez.

G. Arca eto Plac'h Yaouanq koant,
Petra ee eta o santimant,
Pa velit ar re o deveus be t

Prest adare da gaout fred ?
Ma na garit hasta a fo,
E medoc'h en risq da goll ho tro.
Va excusit, m'ho ped, maouez vad :
Permettet eo certen badinad :
Mes n'en dèo ket êruet c'hoas.
An hini a dle dont da choas.

R. Mar güelit begou ho boutou,
E velet sonden e seuillou ;
Me gred assur e zoc'h den habil,
Mes da voana e zoc'h difficil.

G. N'hon devecs tam ebet disprijet
An objet a ve demp presentet ;
Hac evel ne zeus coz voutez
Ne gaver dezi e farez,
Onnez uve, aboues guedal,
Me a gred a gavo eur chanç all,
Ni n'en domp qet deut assur evit-hi,
Ha ne sonjomp a grenn enhi,
Mes evit an hini a zo embannet,
..... e zeo hanvet ;
Hac evit e desina ervat :

..... êo e zad.
Ne glaskit ket eta digarei,
Pa zèo guir e mèn en ho ty,

R. Skaër mad êo sur, pa explikit,
Eus a behini e parlantit ;
Mes red êo goulen diout-hi
Ha contant êo da zi-nezi.

Mont a ra da ober eur bale

Ouz au daol e meuz hi kavet
Trankilamant bras azeet,
Hac e deus lavaret din-me
Ne voa ket piou a zo aze.

Oh ! va mignon, ar respont-se
A zo tout-a-fêt d'hon doare :

Disquez a ra e zeo prudent,
Ha guiñ vestrez d'e zentimant,
Hac evel pa lavarfe c'hoas
Ne rofe ket e dord da peb goas,
Mes hepken nemet d'an hini
A zo het destinet dezhi ;
Ennez eo just a zo amâ,
Ne broposan ken nemetâ ;
Rac-se eta, grit demp antren,
Kouls hac oll eus va banden,
Oh ! va mignon, na c'hui c'heus talant
Da drêi an traou d'ho santimant !
Mes gouzout a rit, an habilla
▲ ell ivez avichou fazia ;
Rac-se eta, brêma permetit
Mar dê eus ar plac'h-se azeet
E zêo occupet ho speçt ;
Ha pa deus rœt ar respont-se
Ouz traou all sur e sonje
Rac amâ e zeus en em gavet
Alies a dud d'hor guelel,
Joa vras meurbet hon eus dioutho,
Gant kement-se evel ato
En em gavet ker just ha tra
Da veza primeri ar bara
Dre chanç gouskoude dêc'h e voa deud
Ar meliner laër gant ar bleud ;
Hirio eta me rank poazat,
Hac ar plac'h se ribottat ;
Aac ouspen kement-se c'hoaz,
Dêi êo ive da rella an toaz.
Rac se noc'h eus ket a voyen
Da gaout hirio hor femellen.

Ma n'e zeus ken ouz ho trêza
Nemet primeri a vara

Deut ganem-me oll a vanden
Da gundui ar femelen :
Ni on eus eur zal vras preparet,
Tapisset kaer a fleurachet,
Poazet bara, kig ha stripou
Paste, fars-forn, goadiguennou :
Eun dol hir a zo bet savet
Evit ober dem eur banket :
Na c'hedomp nemet ar plac'h neve
Evit festa mad Molarje.
Pa vezo deut, ni a raï friko,
Ni a gano hag a gonto,
Ac'hanta eta, va mignon,
Petra a lavar ho calon ?

Kement a rit sur o pledi
Em be c'hoant bras d'ho contanti
Gouscoude a ve dirêzon
Lezel va zy en abandon
Rac certen eo evit merc'het
Ne ket ès din da zivoere
Hac ispicial an hini
A fell déc'h da reketi ;
Mes c'houi a zo grêt ho labour,
Ha noc'h eus ezom a nep sikour
Nemet da gana, da youal,
Da fricotta a da zançal.
Cetu amân eur potr boujant,
Hac a dalvo déc'h keit a kant.

Ho ! nê ket da glask ar seur-se
On-me sur laket da vale :
Tec'h alesse-te, kôs marmous,
Ni ne glascomp ket eur seurt mous.

Mar kavit ennes re dister
Evit dont da ober hoc'h affer,
Cetu amân c'hoaz eun all,
Hac evit ar guël n'eo ket fall.

Bonjour dèc'hu va den mad,
Noc'h eus brêman nemet tostât,
Me gred eo dre guriosite
Oc'h en em brezantet aze
Evit guelec hor plac'h coant,
Huc evit c'hoas ho santimant,
Mes hon affer-ni zo da guenta,
Hag e fell demp e finissa,
Mar teuit amàn d'hon dale,
D'hon tro ni a ray dèc'h bale :
Ni o paeo, hervez ar c'hiz,
Certen gant ar memes moniz.

Lavarit din-me. me ho ped,
Ha merc'hed ho prô zo decedet,
Ma rankit eta dont keit-mâ
Da glask merc'hed da fortuna ?
Me a glêo lavare-tu en Breiz
E zeus certen merc'hed aleiz ;
Ma rafec'h eur bourmenaden,
E alfec'h guelec meur a vanden
Ha marteze bars fin ho tro,
Ho pe ar choas euz anezo :
Evit amàn ne zeus nikun,
Contant da ober e fortun.

Lavarit din-me da guenta,
Petra a signifi promessa !
Me a meus clêvet en peb amzer
E tleer derc'hel mad d'ar guer :
Hoguen, unan eus ho merc'het
E devez d'an den-màn promettet
Feiz kercoulz ha fidelite :
Ni zo deut da glask an dra-ze.

Penos eta ? me am boa kredet
E voac'h c'houi, eun den a vras speret
Guir eo, ar seurt-se avichou
O devez calz demeuz a ureou.

*Quandoque Bonus
Dormitat humerus.*

Ha kredabl eo e vè en ty
Eur plac'h contant da zemezi,
Hac e ve èt keit-se ar brud,
Hep ma ouffe netra e zud !

Pa ho klévan evel-se ho parlant,
Me vel oc'h eus kals a dalant,
Ma têod mad ha discadurez,
Ha kals insign ha mil adres ;
Ec'h ouzoc'h mad forji guêyer
Evit tremen ervat an amzer,
Hac e fell d'eoc'h gant ho latin,
Hon amuzi ni da c'hoarzin ;
Mes, hac e vec'h-hu advokat,
Pa noc'h eus ket d'ec'h ar gos vad,
Me a esper dont d'o fêza,
Hac a c'hoarzo da ziveza.

Ridebit bene

Qui ridebit in fine

Abars ma refot din-mê plega,
E skuizot sur c'hoas en ho sa.
Sellaouit ervat, va c'homper,
Pec'het bras èo koll an amzer ;
Eur poent a zo evit peb tra,
Ha bremàn eo poent finissa.
Diou vech e meus bet goulennet
Ac'hann ar plac'h a eured :
C'hoas daon c'her anter : diou vech anter ;
Desidomp buan an affer.
Eur vech, diou vech, anfin teir güech,
Cetu me bremàn direbech,
Roit din-me bremàn ar plac'h,
Pe e zà en hent gant va zac'h.
Ar banket a zo preparet,
Ha bezit sur e vo débret.

Goude kement-se ni a velo
Pe c'houi pe me eo a baeo.
Ar pez a ra din differi,
Eo an ezom eus anezi ;
Rac ouспен ma zeo eur plac'h koant,
Leun a furnez hag a skiant,
Eo dilijant en he labour,
En peb amzer prest d'am zikour ;
Mes mer oc'h eus hi-decevet,
Ha dija en em brometted,
Allas ! he c'halon a vo eno
Hac amàn e enep ho meno.
Allòn, dont a ra em memor
Oc'h eus grêt din kalz a enor
D'am pedi da vont d'ar banket,
Hag oc'h eus bed memes peded
Kement zo em c'hompagnunez
Da vonet ive assambles
Eh bien ! heno en eur banne güiu
Me a veuzo va oil chagrin,
Hac a lavaro koulz hac eun all :
Rac-se, evit en em accord,
Pa viot prest, deut-ta en ty.

Compliment d'ar Vreg-Yaouank

Debonjour d'êc'hu, Plac'h-Nevez,
Me ho salud gant levenez,
N'en dêo ket va condition
Dont amàn d'êc'hu da sermon :
Lezel a dleer kement-se
Gant an nep ho deus autorite.

Mar plij ganêc'h dont d'an llis :
Eno ar beleg, hervez e ofiç,
A expliko d'êc'h an oll zantelez
Demeus ar Sacramant a Briedelez,
Hac an oll obligationou.

Me, va mignon, a zo eun den yaouank
Hac a zo bas eus a skiant ;
Mes, mar d'hon ket ignorant dre natur ;
Rac ma n'oc'h ket anavez va zad.
Me a rayo d'êc'h anavezout e vab.

Ober a r'êr din calz demeus a enor,
Güelet seurt compagnunez etal va dor ;
Mes ret eo d'êc'h ervad lavaret din, va mignon,
Demeus a betra e zeus question.

Gant..... e zòn bet sortiet,
Demeus a..... dre e gared,
Da c'houlouen dezàn da sont da eureuji :
..... a r'êr eus anezhi
Tri embann, va mignon, oc'heus qet clêvet
A zo bet lennet dissul gant ar bêleg
Ha fennos, gant c'hraç a Zoue,
Hon eus sonc'h mad da gass ar bêvare.
Mar deuit, va mignon, bremàn d'on rebuti,
Ni ho lakay souden da gaout eun troatad fri,
Hac e viot condaonet da baea eun amand,
Ar pez a gousto d'êc'h eun neubeudic arc'hant,
Va mignon, na lavarit ket c'hevier ;
Güell eo d'êc'h lavarat bremàn bo *Pater* ;
Rac bremàn-sounn, dre abiou ho fri,
Me a meus-hi guelet dont an penn an ty.

Doue en deus lavaret biscoas den en ên n'eo antreet
Nemet gant couraj en defe combattet ;
Ha c'houi, va mignon, n'ho po ket ho plac'h
Na renkfôt disputi eur peunadic c'hoas
Glorius en ho cavan meurbet
Va mignon ker, gant ho merc'het :
Ar merc'het ; a zo goall bejou, hac o sco evel diaoulou,
Ha pa doront o c'heleyou e c'hariou gant o hivinou.
Evidôn-me a lava crenn .
Birviken en maouez ne fifen.

M'am'bijé gouezet toujec'h hirio d'em güelet,
M'em bije da fest preparet treid siliou, ha re arinket,
Pêvar gartier eur guellyenen,
Ha diou scouarn verryenen.

Dont a rant meurbet d'en em estoni,
Pa glêvan peguer kaër fest ho poa demp da brepari ;
Mes mar kirit dont dissul goude an oferen-bret,
Ni a breparo dêc'h ivez eur banket ;
Ni hon eus laket dêc'h deus ar ber
Luz, alamandez trinchin, mesper,
Hoc'h assistañ, mar plich dêc'h, compagnunez,
Me ho ped da lakat meurket eves,
Hac eur goall barti certain a velàn aman.
Mil aon a meus na golfen gantàn.

Eur groug-lassiq hor boa trapet ;
Eur goulmic venn hor boa trapet ;
Mes, allas ! ne voa ket goal gre,
Hac e zêo, sivoas din achappet adare.
E asket gléi a zo torret, achap a boll ne alfe ket
Hac hon eus clêvel lavaret e zê amàn eo diskennet.

Yaouank on sur er bed, ar c'hustumou n'ouzòn ket,
Rac me ne meus ket studiet c'vit goulén na rêi merc'het
Mar deu din lavaret netra sot
Mar plich ganêc'h em excusot,

Dre ma zont deut da dal an ty,
Ne garfen ket sur dont d'ho choki,
Na d'ho repren, na d'ho facha :
Rac certen an dra-ze a ve sur a goassa,
Mes evit kavet tro da barlant,
Ma vo a propos va c'hompliment,
Excus ha pardon a c'heulennàn :
Pa blijó ganêc'h e komzin brêmàn.

Seblantout a rit beza habil,
Hervez ma velàn, eus ho habill ;
Rac-se e garfen gouzout ouzoc'h
Petra a glaskit, ha piou oc'h

Cazi hep gout an hent gant an den a Eured.

Mes pa zôn digasset eus e bers ho pete.

Me a ray e excuz ha va ini ive,

Kent avanç, davantaj e zan d'en em adressi

Dêc'h-tu, o va Jesus ! hor c'hrouer, hor Messi ;

C'houi eta, o va Jesus ! a roïo din ar speret

Da explika peb tra evel ma zeo dleet ;

C'houi a ray din ar c'hraç, pouvoar hac elokanç,

Sklêrijen d'am speret da gomz en ho presanç

Eh bien ! plac'h yaouank n'em strinkit d'am daoulin,

Da c'hooul bennos ho tad ken mont da eureuji

A beurs Doue an Tad e zeo demp ordrenet

N'ankounac'haïmp ket nep o deus hor maguet.

Bennos Doue an Tad a c'houlen da guenta,

Güir Grouer eus an ên Gouarner ar bed-mâ

Mes guelet a ran c'hoas pa remerkan evad.

Penos e koe daelou demens ho taoulagad

Ne ket ar pez oc'heus grêt eo ho c'hra constrictet

Mes guelet ho Tad, ho Mam, penos int desolet

Allas ! rêson o deus ; n'en dêo ket hep snjet,

Guelet e teuit da guittat nep o deus ho maguet,

Gant kement a soign savet bete vremâ,

Cemeut-se a lako o c'halon da rannâ.

Arba, Tad truezus, distroit ho taoulagad

Var ho merc'h..... a c'houlen he menat,

Emedi d'an daoulin dirazoc'h prosternet,

Deus a greiz e c'halon o c'houlen e souhet

Ho c'houi Mam desolet, roit ho pennos ganthi

Gant ho merc'h..... da eureuji, — *Ia, ia, ia.*

Holla ta !..... avoalc'h eo kement-se ;

Obeïset oc'h heus da C'hourhemennou Doue

Grêt oc'heus ho tever gant guir humilité

Ha Doue ne c'houlen nemet guir volonté.

Eh bien !..... plac'h fur ha disket mad

Avansit ho passion da vont betec ho tad,

Ha roit deân daou bok eus a greiz ho kalon

A' gcontract ar güir priejou.

Me a meus grêt va c'hommission :
Chanç vad déc'h ha guir mignon.

Compliment d'Ozac'h Yaouank

Ha c'houi ive, va den prudent,
A verit sur enr c'hompliment ;
Me reçet déc'h digant Doue
Pep chanç-vad ha prosperite.
Cetu dirazoc'h an objet
A goulennet hac accordet :
Mar don bet ouz ho retardi,
Na gavit ket dies va excusi :
Gouzout a rit an vraz commun
Pa vez kestion eus a fortun,
Breman, mar d'oc'h pres, hastit a fo,
Ne ket me mui ho taleo,
Nemet ma rofot peb a vanne
D'am c'hamàred koulz ha din-me.

DISCOURS EVIT GOULEN EUR PLAC'H DA EUREUJI

Salud, Campagnenez, gant eur galon ardent,
Euz a greiz va c'halon e ran va c'hompliment,
Ma ouifen-me an tu, ar fêçon d'en ober,
E ve va brassa joa plijout d'oc'h oll dousder.

Peb action gaer, d'e ober pa zeomp,
E zèo dre Sin ar Groas atao e commançomp :
En hano an Tad, ar Mab, hac ar Speret-Glan,
Zo tri Ferson distinct en eur memes unan.

Abaoue ma voan bian, var brec'h va maguerez,
Me am boa an dessign da eniren er Palez ;
Mes êru eo an deiz, an amzer ar vech màn,
Me meus bet an enor da zon betek ennân.
Evit beza hirio antreet en ho ty,
N'ouzoc'h ket, marteze, tenor va c'hevridi :
Me zo eur messajer zo amau digasset,

Ne radovit ket va Itron din, aotrone,
Diouz ar pez c'houlennit diganen-me ;
Rac mar ho pe diganen-me tennet
Ar gaera demeus ar merc'het,
Goude diouzôn-me c'houi c'hoarzfe,
Hac el leal, rêsond-mad ho pete.

Ne grenan, na ne chenchàn liou ;
Ma n'am be ket arc'hant, me tremeno abion :
Ma vomp-ni ganec'h-hu refuset.
Ni a gavo ei lèc'h all merc'het.

C'hoarvezout a ra ganec'h evel har merdeadi,
A ya oll da naov heur da zèbri dijuni.
Ha goude e vent epad an de neuze o naviga,
Allas ! alies o klask, e rankont rabata,
Va mignon, na chommit ket aze d'ober brud,
Lipid bremàn ho peg hit kuan d'ho clud.

Pa voac'hu êru gant en hent,
Me sonje din e voac'h eur vanden zent
Mes bremàn e credàn a dra certain
E aoc'h eur vanden merc'hetaeryen.

Me a ya da zivoukla bremàn va boutou,
Evit mont da zispen va roudou.
Rac evit ac'hann, var ar velàn,
N'hor bezo netra evit brèman.

Mar d'oc'h attachet en pefot merc'het.
Me a lavaro dec'h e pelèc'h sur e kafet ;
Mar kerit mcut da vourg Plougonven,
E kafot eno eur plac'h evit eur grampoezen.

. Sac'h ar bier ! ar re-màn afat a zo tud,
Koulz ar re vras hac ar re vunut ;
Evit kement a meus bet dé lavaret,
Ne reont van ebet evit dont d'am c'hlêvet.

Me a vel ervad e rankàn sur plega,
Terri ha brec'h ha gar hep en em vlessa
Ha dont d'e digass dec'h amàn da dal an nôr,
Da c'hout ha c'houi a recevo gant calz eus a enor.

Pa oc'h eus obtenet e venediction
Distroit c'hoas eus ar Vam pini e deus ho kanet
Ho livret da zimezi, pa oc'h eus er souhetet,
Kent avanç davantaj, me c'houlen evithi
Kônje «breur, e c'hoar, kent mont da eureuji,
Paerou ha maeronnez, mar e maint var ar plaç,
Me c'houlen evithi ho pennoz diganeac'h
C'houi o poa contractet en lis evithi
Hac hi c'houll ho pennos kent mont da eureuji,
Bennos e holl ligne, kônje he holl c'herent.
Cetu aze ar seul sujet ma zoum-ni deut en hent.
Bennos a re zo maro n'allan ket da c'houlen.
Rac kalz a galonou contristet a lakfen.
Güell e zeo eur beden d'ar re zo decedet,
Eguet goul o c'honje, pa ne maint mui er bed.
Dre-ze en ho pedàn da lavaret gane
A salm eus an llis en repos d'o ene. *Da Profundis.*

Arça, compagnevez a zo ama present,
Me zezir ar boneur d'ho renta oll contant :
Me ne meus ket, sivoas, speret an oll ele,
Da gontanti peb-unan hervez e volonte,
M'am bije ar pouvoar an deus Alexandri,
Pa voa bet prisonnier er guær eus a Vitri ;
Ennez a ziskare, gant mæz e drompillo,
Seiz murail simantet en dro da Jerico ;
P'otramant ar pouvoar en devoa Jozue,
A laze en combat seiz a trêgon Roue,
A arrête an eol un heur anter en ær,
Pa voa o combatti, evit rêi dezàn sclerder
P'otramant ar furnez en devoa Salomon.
Pe an talantchou caër cus an doctor Ciceron,
Me forchfe eun discours a vije d'ho souhet,
Nonpas deus an anter ar pez a veritet.

Eh bien ! kompagnenez, en em rejouisset,
Cel bet demp a hini pini hor boamp deziret,
Hac hi ker hac an de pe an eol ardant

Hor c'halonou memes a rente oll kontant.
Rac e hini e-unan a zo pareillamant gayé,
Evel ma ve an deillou er gues en fin mis maé :
Memes ken a sônch din an devez a hirie,
E devens astennet deg bloavez eus va bue.
Graç deomp d'en em velet en palez celestiel :
En hano an Tad ar Mab, hac ar Speret-Santel.
Eno gant an *Æl*-Mad ni vo représentet,
Pa vo ret renta kont dirag Zalver ar bed ;
E vo lennet an decret, hep hor favorisàn ;
Deineus ho meritou e vo barnet pep-unan.

Mar e meus choquet den dre re a liberte,
E c'houlennan mil eckus digant ho majeste ;
Bet e meus ho kônje gant ho permission,
Me ho trugareca deus a greis va c'halon,
M'ho ped d'am asista evit e c'hondui
Ma zefont gant enor d'e c'hass da eureuji.

Rimou evit gouten ha rei Plac'het da eureuji

Orsus eta, compagnunez,
En em retirir oll a gostez.
Evit m'am be an avantaj da barlant
Aman, en ho présenç, an langach clocant.
Ne ouffen ket certen ober eur guelloc'h tra
Eguet dont da ober Sin ar Groas da guenta.

In nomine Patris et Filii

Et Spiritus Sancti.

Ha neuze e lavarant *Amen*

Evit êchui ervad va feden.

Debonjour ha joa eu ty-màn :

N'en dêo qet a chom amàn ?

Ia, va mignon, eun action vad oc'h eus grêt,
Dre Sin ar Groas pas zoc'h commencet :

Me a rayo ive coulz a c'houi

In nomine Patris, et Filii,

Bac evit êchui ervad va feden,

Et Spiritus Sancti, Amèn.

Presenti ar rër eur Vreg

Cetu aman eur plac'h yaouank
Hac e deus eur speret kontant,
A zo diangach a bep lec'h.
Ha ma na dêo ket mad d'ho keut,
Certen ec'h ellit mont en ho rout.

Ne douetàn va mignon koant,
E ve ho ty ken dibourve eus ar blac'het yaouank.
Na zisgasfac'h d'emp unan da velet,
Certenamant ne vezo ked refused.
Mes houmàn a zo an daill var e beg
Da vezà êt pell-zo d'ar vicher eus ar vreg.
Me vel merket var e c'had clêi.
E zeus bet goas o paquet dêi
Kassit-hit buan var e guis,
Gant aoun e defe droug avis.

Klêvet oc'h eus alies parlant.
O homz deuz eur zal kaer ha brillant :
Ia, va mignon, me meus eur sal.
Hac a zo oll carget demeus a drouleal :
A bep-tu demeul an daou gostez,
Nø zeus nemet akajou hac olifes,
Ha dindan an treid, evit servicha da bave ;
Ia, ar zall gaer-mà zo dre oll dekoret
Demeus ar beder blantenn guera a ve kavet :
Unan a zêo ar roz, eun all tulipes,
Eun all ar palm superb, hac eun all ar cypres.
Ha c'hoas ne meus kontet dêc'h netra
Evel e zàn da gonta dêc'h brêmà :
En creiz ar zal-màn e zeus eur femelen
Demeus ar re gaëra e veljot birviken ;
E muzellou a zo demeus ar roz bordet ;
Michañç e zès ounes o fell dêc'h do gavet,
Va mignon, gouzout a rit ervad

Pa gaver an avel eo a ranker guentat ;
Ha c'houi, pa gafet diskarg d'ho merc'het
Me ho ped, mignonet, n'ho refusit ket,
Ha c'hoas trugarekaït Doue,
Pa na reomp en guis Table,
En devoa da ravissa ar merc'het :
An devez memes demêus ho eured.

Cetu aman eur plac'h iaouank,
Zo ker kaer hag an eol brillant
E diou chod a zo ruz evel ar rès,
Distinguet evel an deiz dious an noz,
E zal a zo ker kaer hag ar c'hristal ;
Lakat a ra kalon mab da dridal ;
Ha ma na blij ket houman d'êc'h,
Na ouffen ket petra da ober d'êc'h,

Troublet meurbet eo va speret.
Pe eur banne re am beus evet,
M'ar deo hounnes ar femelen,
A meus gret anezhi ar goulen ;
Mes ar plac'h-se, pa zeo deuet,
Ne deo ket da veza refuset,
Me a zo ive eun den iaouank,
Hag e meus eur speret kontant,
Hag a zo diangaj en peb leac'h
Hag a dalvez hirio koulz ha d'êc'h.
A lakaïo va dorn en he hui,
Hag a ielo gant-hi da zimezi ;
A raïo out-hi peb kontrad mad,
E vel a eure e mam d'he zad ;
A bremetto dezhi fidelite ha fe
E keit ma vezin en bue :
A zalc'ho mad dêi beteg mervel :
Ne ouffen ket lavarat guell.

Arça eta, va mignon kez,
Cedi a ran ganec'h ar plac'h nevez ;
Mont a ran d'he digass d'eoc'h d'an nor :

Me o ped d'he receo gant hen or
Disdostait eta, den nevez,
Da guemer en dorn ho mestrez ;
Evit rêi d'eoc'h an arvoenti,
Lakit ho torn en he hini,
Ha sonjit penos e pado,
Mo komanant beteg ar maro.
Va deut ket d'he goaldre'ti, d'he chaseal eus an ty,
Evel pa ne anevafac'h ket anezhi :
Pe m'er grit, va mignon, selaouit mad eur guer :
Tec'hit ervad eves demeus ar goalinier,
Ar goalinier a zorn Doue oll-buissant
A bunisso ar re vechant ;
Da lavaret eo ar goalinier
Demeus he fulor hag he goler,
Pere a c'hellomp da evita,
O veva en graç Doue er bed-ma,
Pedi Doue, roue an Tron,
Da rêy deoc'h holl e venediction,
Ha da assista en hoc'heured hirle,
Evel ma reas guechal en eured Cana, en Galilée,
Tachit eta da gundui eur vuez vad,
Hervez Doue hag hervez ho stad,
Evit ma c'hefot gantan da repos
En fin ho puez en gloar Doue d'ar Barados.
Me a ya da lakat va zok var va fenn,
Evel a dle ober peb christen,
Compagnunez, gant ho permission,
Pa meus grêt va dever ha va c'homission.

DISCOURS

Da lavaret e-kichen an ty da eur Goulen

Salud, tud ag enor, gant peb somission :
Tud eus a bep kalite hag a bep kondition ;
Ho ty, ho madou hag ho domes tiket

Hag ho polonte vad o devez va charmet,
Lavaret a c'hellàn hardi ne voa ket biskoas
Gant kement a blijadur oc'h antren en eur plaç.
Ho ty so situet, ken toñ, ken muraill,
Eur plaç a blijadur, n'en deo ket hep marvail.
Ar re'n deus composet ar portret eus ho ty,
A zo eun den a speret, na fell ket din doueti,
Ne ellet ket, va mignon, dont da baea ervat
Eun Architek habil, ma na labour ket mad,
Me a zo bet ho vale en kalz eus a vroïou
Hag e meus goneet nombr bras a victoriou,
Mes hor Zalver beniguet a zo marvet er groas,
Kercoulz evit ar pinvidic evel ar paour, ziousas,
Eun amitie sincer e zeo va c'hevridi,
Eur femelen iaouank a zo maguet en ho ty,
Karet gant eun den iaouank zo demeus ar c'hanton,
Hag a zo deut hirio an de d'he assignation.
E hano êo..... brêman n'el lavarin ;
Mes me en lavaro kentoc'h ma finissin,
Prest hon da finissa hac ive da gommanç,
Ma parlantàn davantaj, me am bezo setanç,
N'estimàn eur procuror o tifen e gojou,
Ma na c'hone e broces ha diou-t-he ar gaou ;
Ha mar kavàn-me c'hoas teir guech en odianç,
En durant m'er selaoïn me am bezo setanç
Rac roue absolu-hon, mar kirit var c'hredi ;
Pa c'houlàn va c'hevridi, e rankit e rêi di,
Me êo ar Roue Arthur, puissanç souveren,
Breiz-Izel en antier zo dindan va c'hourc'hemen ;
Ia, en assuranç guir-roue ar Vretonnet,
Hac Autrou en Breiz-Izel d'an Noblanç ha Princet.
Da guenta, evit commanç, Breiz zo din en entier.
Montroulez ha Lanmeur, Lannion, Landreguer,
Pontivy, Kemperle, bete guele Leon,
Kastel-Lin, Porz-Louis, ar C'hroizic ha Crozon,
Ar Faouet ha Sant-Nic, Cast, Moëlan, Poullaouen,

Ha Qemper-Caourantin, Castel-Pol, Lesneven,
Plöstin, Garlan, Plouyan. Larigonaval, Güimæc,
Locmiæl, Plouezoc'h, Plougasnou, Sant-Briek,
Guerleskin ha Benac'h, Callac ha ker-Ahes,
Plourin, Sant-Yan, Rosko ha Plouneour-Menez,
Hag ar guêr a Roazon, e lec'h ma chom bepret
Parlamant Breiz-Izel hac e brezidantet ;
Ha Taule ha Kallot, Perros ha Lanvelec,
Lambal ha Sant-Malo, Lambaol, Sant-Thegonnec,
Plêiber-Christ, Commana, Plougouven, Lockirec,
Conkerne, Ponabat, Lohuec, Carantec,
Pontrêo, Plufur, Sant-Sêo, Guiclan ha Pontmenou,
Plouaret, Enez-Vaz, Pont-Aven, ar Ponthou,
Plouescat, Plouizi, ha Castel-an-Taro,
Hac er môr burzudus a ra dezo an dro ;
Coateven, Peder nec, Pempout, Plegat-Guêrand,
Hac anfin kement zo dindan ar firmamant.

Arça ta plac'h iaouank, va guir bried fidel
Cetu c'houi Rouanez ebars en Breiz-Izel ;
Cetu c'houi Rouanez var ar c'heriou hanvet ;
Bezit eta kontant eus ar fortun a ret.

O ? saperlot, terrupla den oc'h c'houi !
Studiet mad oc'h eus sur ho filosofi,
Hag e zêo certain impossubl d'êc'h mankout :
Mes me zo ignorant, n'ouzon netra en tout,
Nemet dêbri va yed ha lipouzat va lez
Dêbri patatez, stripou ha souben ar c'hrampoëz.
Mes en eur gonta d'êc'h va nebeut talantchou,
Ne ouzon ket penos e ancounac'hàn va rimou.

Debonjour jêc'h-hu oll tud a enor, pini
Zo deut a galon vad da guichennic ho ty,
Gant eur joa ar vrasa d'ho saludi brêman ;
Eus a greiz hor c'halon ni a zo deut amàn ;
Saludi a reomp raktal ho personnaj,
Gant an oll respect a gommand on pizaj ;
Hac er memes amzer holl o compagnuez.

Rag assur tud vrao oc'h amant assambles.

Me a fell din bréman sur, va mignon,
Gouzout eus a betra e z'eo kæstion,
Rag ma velan eur seurt bänden
Eru da doull va dor d'am zurprenn.

N'en d'eo ket evit ho surprenn,
N'hag evit ober poan da zen
E zomp aman en em assamblet
Evel ma ve eur vanden denved ;
Ni a zo o klask da eureuji,
Ha na ellet ket da ziferi,
Dindan boan da baea an amand,
Hag ar misou antieramant.
Eun ouades am boa tennet,
Hervez ma z'êo deomp rapportet,
Diskennet e z'eo en ho ty,
Rac-se rentit-y deomp-ni,
C'houi a renk renta deomp rêson,
Demeus anezhi va mignon.

Ni zo e klask eur plac'h iaouank
Mar kirit ni e hanvo deoc'h franchamant :
He hano eo *Guillemet ar Maout*,
Hag evit beza priet da *Charl ar Zaout*,
Da zont d'an iliz da eureuji
Evit echui an dimezi.

Guillemet no ouie ket
E oa hirio deiz he eured,
Hag a zo eat d'ar vèlin da oza kerc'h,
Rag-se redit m'ar kerit var he lerc'h
Rag ar meliner a oar parlant
Hag a ambus ar merc'hed iaouank,
Aoun e m'eus na rankac'h reir gortos,
Abars ma c'heruo e vo noz.

M'am be ar bermission
Da antren en ho ty, va mignon,
avañ pront, hep diferi,

E penn o tol va c'hevredi,
Pa oan eru e pen ar c'harz
Me oc'h anaveas eus ho c'hoarz ;
Hag o klevis o lavaret :
Eru eo devidon ma muia karet.

Pa hon eus ho kuelelet o tont da dal argled
E sonje din e oac'h eur vanden mortololed
O vont da Vrest evit eun embarkamant
Pe soudarded o klask ho lojamant ;
Pe otramant eur vanden stouperien
Eus a Skrignac, Lokeffret pe Berrien.

Sic clamabor et meditabor ut colum,

Evel-se e komzan pa ven ho latina,
En hano Doue, n'hon daleit ket
Rag ar zakrist a zo goel bresset ;
Me zonj d'in eo eus a urs sant Krimpin,
Hag e gar dijuni mintin.

Ker brao, ker koant oc'h eus komset,
Va mignon ker. ho refusi, n'allan ket ;
Ma a ya da ober eun dro dre va zy,
Da c'hout a me gavo deoc'h ho kevridi ;
Ha pa rin-me eun dro var va zeul,
E teuio eun dra benag d'am heul,
Cetu aman eur vaouez koant
Ha ne deo na kos na iaouank
A dle ravissa ho speret
Gant he fresañ hag e guenet.

Ar vaouez-ze zo perc'henned,
Emedi ar liou var he beg :
Hag e deus bet choaset he far
Ha ne ra fors piou zo va var.
Me a gred e deus dija poazet
Eus an darbot he biziet :
Kassit-hy ganec'h var he c'his,
Rag aoun ne defe droug-aviz.

Terrubl meurbet oc'h dificil,

Va mignon, ho komplimant zo sivil,
Cetu amân eur plac'h iaouank,
Hag a deus eur galon ardent,
Hag e dle plijout d'ho fantazi.
Pe oc'h dies da gontanti.

Ni hon eus-y diguemeret,
Ha ne ket da veza refuset ;
Pa vo êru an heur, mar kar,
Ni zo prest da choas dêi e far,
Mes eun all a c'houlennomp c'hoas,
Hac a zo blesset en e scoaz,
He servicher kercoulz hac hi ;
Eru eo ar poent he zepari.

O presanti dêc'h an objet
Pini oc'h eus dija goulennet,
Ouspen o c'houlan pardon,
Mar hon eus bet division.

Didostaît-ta den a zevez,
Da ziguemeret ho mestrez ;
Ni he ro dêc'h a galon vad,
Ganf kônje he mam hag he zad ;
Kônje e c'herent hag e lignez,
Da antren ganêc'h en priedelez.

Pedit Jesus, Roue an tron,
Da rêi dêc'h e venediction,
Ha d'hoc'h assista evel a eure
En eured Cana en Galilee,
Conduit eur vuez vad,
En doujanç Doue, hervez ho stad,
Hag goude monet da repos
Gant an Ælez er Barados.

Parlant a rit ken delicat
Evel pa vêch eun advocat ;
Ma vec'h pignet en eur gador,
E sônjefet vec'h eur predikator,
Manific ec'h ouzoc'h kozeal,

En oc'h avantaj ordinal.

Ganêch m'en em gav estonet,
E kever an nor êruet ;
Rac me a gavje dêc'hu gue !
Chom en tu all d'ar porastel,
Bete gouzout ha ni hor bije
C'hoan d'ho receo amâ hirie.

Evel ma zoc'h tud a enor,
Deut demeus a zirac va dôr ;
Ne fell ket din ho rebuti,
Na ken nebeut dont d'ho choki .
Clêvet a garfen libramant
Petra eo sur ho santimant.

Evit ne ellot ket ignori,
Clevit bremân va c'hevredi :
Me gonto dêc'h a boent a boent
Evit petra omp deut en hent
Ha mar domp amân arrêtet,
Ec'h ouzoc'h erfat ar sujet,

Achui rân va c'homplimant.
Respontit din presentamant :
Troît ho kein hac hit d'oc'h hent,
M'ho kao ker sot breman ha kent :
Reir e chommit d'ober demp brud ;
Torchit ho peg ha kit d'ho klud.

Herves m'ho klevan ho parlant,
Oc'h eus dresset ho komplimant ;
Me gred oc'h bet er c'hademi,
P'otramant er filosofi,
M'am be c'hoant d'oc'h antreteni,
Me ho pedfe d'antren en ty

Klevet a garfen ar rêson
Deus a betra eo kestion,
Pa ho kuelan deut eur vanden
Da guichen hon ty d'hor surpren.

Eur joa vras a meus-me meurbet

Compagnunez, ouz ho küelet,
Ha mui a meuz certenamant
P'ho klêvan ker kaer o parlant,
Rag na deu demeus ho kinou
Netra en oll nemet rimou :
C'houi c'heus grêt ho tiskoursiou tout,
Birviken ne elfoc'h mankout ;
C'houi c'heus un ton ken elokant,
Ken delicat ouzoc'h parlant,
N'ho oufen ket en ped fêçon
Dont da gont dêc'h va rêson.

A bars kement-ma va mignon,
E karfemp gout ho commission,
Hag e kontfêc'h demp ho toare,
Vit petra oc'h deut da vale.

Mar d'eo kement-se d'ho souhet
Ne vezot pell refuset ;
Oblijet domp vel ma zeo güir
Da ziskleria dêc'h hon desir.
Chois bras e meus en assurance
Da gauout an enor eus ho presanç.

Grit buan dezään azea,
Aount a meus ne deufe da simpla.
Roit eun taç hag eur voutaill
Da zigrassi mad e gorsail.

COMPLIMANT TOL

M'ho suppli compagnunez, da bresta ho silanç
Evit ma parlantia bremàn en ho presanç,
Gant encr, d'ho yec'het me a deu da eva
Hag abeurs ar Vreg-Iaouank en ho trugarecàn,
P'ho c'heus bet ar vadelez d'he beza assistet
En devez a hirie ebars en he euret,
Hac evit oc'h oblija ec'h evin davantaj
Da yec'het nep zo roet gant Doue dei evit partaj.

D'ho yec'het, Greg-laouank, eus a beurs oh pried ;
Doue da rèi dèc'h ar c'hraç d'en em garout parfet,
Ha da rèi dèc'h er bed-mâ kement a souhetet :
Me a reket dèc'h c'hoas assistanç eun Doue,
Evel guec'hal en eured Cana en Galilee,
Me a ev d'ho yec'het oll eus a greis va c'halon,
Doue da rèi demp oll e venediction.

Ne ancounac'naomp qet ive an anaoun decedet,
Tad, mam, breur, ha c'hoar, eontr, morebeset,
P'o deveus bet ar soign, pa voant en o bue,
Da zovetât da bephini ac'hanomp e zanve,
Ghommit, kompagnunez, pephini en e blaç,
Evit kaout ar vadelez d'assista oll er graç.
P'on eus débret hag evet, trugarekzomp Doue
Da veza roet deomp-ni diouze hon necessite,
Exkus-ta kompagnunez, a c'houlennàn brêmàn,
Rac aoun n'am be ket plijet da speret peb-unan ;
Gouscoude e cred-din ne meus lavaret netra
Hac a chokfe nikun eus ar re zo amâ.
Me a ev d'ho yec'het oli eus a greiz va c'halon,
Ouz ho pedi da zèbri ha da eva en ho tiskretion
Chommit eta pepini qeit ma vo e volonte ;
Me n'on ket deut amâ da rèi de zen e gônje,
Graç demp oll da vea bepret en joaustet :
Doue da gonservo kement zo eu eus va c'hlêvet ;
Doue d'hor c'honservo amàn var an douar :

Diskour evit eun Eured

Salud dèc'h, kompagnunez, gant guir humilite,
Pa meus bet an hardisson da zont en ho pete.

Perag na meus-me ket elokañ Ciceron,
P'otramant ar furnez en devoa Salomon !
Perag na meus-me ket guinou ha têod alaouret
Da parlant en ho presanç evel ma veritet !
Me zo deut amàn hirio gant va c'hompagnunez,
Evit goulen ouzoc'h, mar be ho madelez,

Eur recit mad benac eus an de a hirie ;
C'houi oc'h-unan a ell accordi din qement-se
Tennet hor boam d'ar sord da glask ar savanta
Allas ! bac e seo digüezet gant an ignoranta ;
Mes dre ho madelez, ho skient, ho prudanç
M'ho ped d'am excusi demeus va ignoranç,
Me a c'hoarve ganem-me evel a stéréden,
Pa deu an col da para a goll sclêrijen :
Me zo n'em gavet amàn evel en eur jardin
Guernisset eus a lore, a roz a durcantin,
Ha en e greiz e zeus bet magnet eur femelen
Brillantoc'h e unan eguet ar guaëra fleuren,
Me garfe dont a ben da ellont he surpren
Va speret zo troublet, n'ôn ket evit compren
Gant enor e saludàn a oll compagnaunez ;
Peoc'h Doue d'ar re veo, d'an anaon silvidiguez

Brémàn ec'h antre da vit ar Plac'h

Salud dêc'h, Plac'h Yaouank, demeus a bers Doue,
Me a zo dent d'ho cavet en devez a hirie,
Evit gouzout diganec'h ha c'houi zo prepalet
Da zont da effectui ar pez a zo promettet.
Deut ha c'houlén bennos euz ho tad hac ho mam,
Evit dre guement se beza dirac Doue divlam ;
Rac dre e c'hourc'hemen en deveus ordrenet
Respetit dreist peb unan nep ho deüs hor maguet
Sellet e meus en ty mâ ha netra na meus cavet
A guement am oblichfa da fournissa dêc'h merc'het
Diskeuzit demp et a bréma hon contrajou
Hac er memes amzer ive oc'h oll titrou,
Rac meo anzañv ôn eun neubeudic incredul,
Rac va rêson a meus evit bea dicsimul,
Néo quet brao guelet Yan ar Maout
Gant eur brezel en craou ar zaout,
Eur pes corn butun en e c'hinou
Ha goal gaillaret oll e vragou,

Ni ne glaskomp nemet eur vaouez,
Rac or bezo ni assur abars paouez ;
Rac goal difêçon eo guelet eur goas
O von, d'an ty forn gant e doas ;
Ha dreist holl, pa ya da oza e guerc'h
E veler ar merc'het o redet var e lec'h
Eleal, emân a zo eur potr lippet mad
Koulz evel ma voa e vam hag e dad ;
Rac e vam gêz koulz e vam-iou
O devoa a gredàn, peder vorzed o diou
Me o suppli, en graç, kompagnunez
Hag o ped a galon da gaout ar vadelez
Ma teufe din-me dont da vancout,
Deut d'am sicour dre holl gallout,

Pa eruer ouz an Dol

Arça Compagnunez, mar teuàn d'och' arreti,
Bezit ar vadelez d'am excusi.
Stouomp eta d'an daoulin da c'houlenn ouz Doue
Ma teuyo d'hon assista an devez a hirie.

Brêman e taouliner

Doue oll buissant en ènv evel en douar,
Ma meus oc'h offancet. e meus eur guir glac'har
Cetu me d'an douar dirazoc'h prosternet,
Ma vo ho madelez accordi din eur eur reket
Ho pennos, va Doue, eus ar pezh a c'houlennan
Evel ho servicher a daoulinet aman,
Evel goecha: Saint-Yan pa vadeas hon Zalver,
A glêvas en er eur voez abeurs an Tad Eternel
« Ennes e zêo va Mab an hini muia karet ;
« Ma c'hraç ha va bennos a vo gantàn bepret
Bremàn e sao hac e zistro eus ar guèrent
Goude béza goulennet benediction Doue,
E felfe din caout brêman hini e zud ite.
Cetu ho merc'h d'an douar dirazoc'h posternet,
O renta dêc'h-hu hommach, evel ma zêo dleet

— —

Goude bennos ar Verc'hez, aroc mont eus an ty,
E c'houlen a guir galon diganêc'h hoc'h hini :
Or ta deut eta a vuir galon
Da rêy gant ho puguel ho benediction.

Evit ar Vam

Ha c'houi, mam garantezus, pini deus he maguet.
Eur mennat a c'houlennàn, ha n'am refusot ket :
Ho pennos a c'houlennàn, ganêc'h evit ho puguel
Evel güechal ar Patriarch santel.
Bennos breudeur ha c'hoarezet ive pareillamant.
Hini paeron, maeronez, mar maint amàn present,
Hini ar Zent an Ælez, hag hini ar compagnunez
O deus grêt dêi an enor d'he assista en e devez,
Ha breman demp, en hano santel a Zoue ;
Goude renta hon hommach, obliget omp da ze.

*Bremàn e ve lavuret eur Bater, eun Ave hac eun
De Profondis, hac e saver er za*

Savit ta, Merc'h Yaouank, da zont da dy Doue,
Evit effectui en antier ho promesse,
Da virat fidelite bete fin ho pue,
Ha goude d'en em vœlet en barados Doue.

DISKOUR

Pa roer eur Plac'hac, evit echui tout

Kemerit, va mignon, en nebeudic couraj
Rac èru oc'h souden er fin eus ho peach
Ha ne c'houlennan ket mui nemeur a dermen
Rac me evel eo êchu brèman va zrajedien.
Me ar garfe certain demeus a greiz va c'halon
Kaout assur eun nebeut a gonsolation,
Didostait amàn en kichen an treujou,
Ha me a royo dêe'b gant joa vras eur c'hêlou.

Pehini a ellàn kredi cetenamant
A rejouisso meubet ho santimant ;
N'en dêo ket eur c'hêlou heb netra ken.
Rac cetu amàn, dirazoc'h suramant eur femelen
Pehini a lavarec'h, va mignon,
A blije meurbet bros d'ho kalon,
Cetu amàn, me gred, eur femelen
A zo kaeroc'h eguet eur chinosen,
Roz, na fourdilis, na lavant :
Speret an oll a rent content.
E lec'h mo zo tevalijen e laka pep seurt sklérijen :
Kaer eo evel eur stereden, ker caer hac ar verelaouen
Roit an dorn dezhi brêmàn.
D'e c'hass ganêc'h demeus an ty-màn :
Ha mar er grit, klêvit eur guer :
Dioñallit eus ar goalinier
Eus a zorn Doue oll buissant,
Da bunissa an dud mechant.
Me a lavar ar goalinier
Eus e furor hag e goler,
Da lavaret eo, ar c'hollou,
Rac calz demeus a valeuriou
Pere a eller da evita
O veva gant graç Doue er bed-mâ.
Bevit bepret ho taou en doujanç Doue,
Hac ho pezo certain peb seurt prosperite
Peguement benag hep nep douetanç,
Ec'h ouzoc'h inad kement-se en avanç
Gant ho permission e lavar in brêmàn
Ebars eur guer pe zaou, va selaouit amàn :
Qemsket eo, allas ! atao buez an den,
Bepret demeus a joa hac anqen ;
An tieguez zo eui lestr,
Exposet da veur a dempest ;
Ret eo dêc'h beva en guir union,
Ha Doue a roy dêc'h e venediction.

Peb den zo gant Doue choazet
Evit beza eürus ha salvet.
Hoguen ret eo goude goulén
Beva just en güir Gristenien.
Contempli ar societe
A zo entre an douar hac an êe ;
Goulénit bepret digant Doue
Courach ha nerz d'ho liberte
Evit ober pep tra parfet,
Evit se e zoc'h digasset.
Retorn a rankit adare
Da renta cont da eun Doue.
Gout a rit, ne zouetan ket
N'oc'h eus eun adversour er bed.
An adversour-ze eo Satan,
Siouas deomp oll guitibunan !
Pa falvezo d'an drouc-speret
Dont da debochi ho speret
Respontit : *Abrenuncio*,
Ma lavarit : sinot eo,
An Autrou-Doue eo ar brassa ;
Enor ha gloar rentomp dezâ,
Evit goude beza labouret,
Hervez hon nerz hac hon yec'het,
Pa c'hefet divar an douar,
E recevet eur gurunen er Gloar.
Ouspen er goalen e eured
E zeo ar garante comprenet ;
Dre ma zêo rond ar voalen,
Ne all finissa birwiken.
Ne zeus fors absolument :
Ret mad eo da eun den parlant ;
Ma ne respontomp ket an dud,
E teufent da lavarat e zomp mud,
Sònjét hon eus da ober voell,
Sevel aman eur zantinel,

Hac a vo grêt en form eun ty,
Evit respont d'an dremenedi.
Ha c'hui ive, va mignon kes,
Mar oc'h eus marc'hadourez
Pe da brena, pe da voerza,
Partiit buan gante da guenta.
Evit Montroulez pe Castel,
Hac e profitot ne vo ket pell ;
Eno e cafot honestamant
Peadra evit hoc'h arc'hant.
Eur garante evel honnes
Ne all ket finissa james.
Credi a ràn hoc'h eus pedet
Jesus hac e Vam beniguet
Da assista en hoc'h eured.
Demp-ni brêmàn, compagnunez,
Da offr hor peden assambles
Er sacrific an oferen,
Da c'houlén graçou souverén ;
Hac evidomp hac evité,
Goulennomp graçou ouz Doue,
Erfin, o tont da finisso ;
Dalit e dorn, croguit enna ;
Promettit dezi fidelite
Hac hi a brometto dêc'h ive.
Cetu aze e dorn deo
Doue dre e c'hraç d'ho conduo.

FIN



DEVERIOU AN DAOU BRIED

AN EIL EN ANDRET EGUILF,

(Chabistr 6 eus ar C'hod Civil.)

An Daou Bried a dle chom fidel an eil d'eguilf hac en em zicour an eil eguilf.

An ozac'h a dle difen e vreg, hac ar vreg senti ouz he ozac'h.

Obliget eo ar vreg da ober he demeuranç gant he ozac'h ha d'e heulia en qement lec'h ma caro chom.

An ozac'h a zo oblijet d'he diguemeret en e dy ha da furnissa dezi qement tra a zo ret da gaout evit beva hac en em wisqa, hervez e c'halloud hac e stat.

Cetu aze ho teveriou :
Dalc'hit mad dê da bep heuriou
Mar bezit fidel entrezoc'h
Ar Barados a c'honzoc'h.

